



ITRON VARIA AR FOLGOET PEDIT EVIDOMP.




**CANTIC**

**ITRON VARIA AR FOLGOËT.**

Var ton : *Guers Lo-Christ an izelvet.*

D'ar sùl araoe guel an oll Sænt,  
 Er blavez dec-a-tri-uguent  
 Euz ar pevarzevet canvet,  
 Comprenit-en mad, Bretonet :

E tecedas Salaun ar foll,  
 Casseet, rebutet gant an oll,  
 Tretet a zot, disquiantet,  
 Eb croas, na belec anterret.



—Ar branellou a zo chomet  
Ac a veler choas er Folgoët ,  
N'ellont beza nemet mercou  
Euz e faveur e miraclou .

Deut-etâ oll , à vir galon ,  
Deut oll gant guir devotion ,  
Deut d'ar Folgoët da bardona ,  
Deut da Vari d'en-em voesta

Deut e'hui pere ne ouzoc'h qet  
Da besseurt stad e zoc'h galvet :—  
Er Folgoët , an Itron Varia  
A zesqo deoc'h an ent surra .

AMEN.

